

Grit ma lakint ar zantelez  
Arog danvez, deskadurez,  
Arog enor ha plijadur  
Ha ma vint holl kristenien fur !


Grit m'o do nerz 'kreiz o foaniou,  
O c'halon savet d'an envou,  
Ha ma tremenint o amzer  
E servich Jesus o Zalver !

J.-Y. COGNEAU

IMPRIMATUR :

Quimper, 2 Août 1922.

A. COGNEAU, VIC. GÉN.



8737 — Brest, moullerez ru ar Chastel, 4.

8N2-3-018



Ploucis

## Kantik da zant Jilli



Levenez vraz en hor c'halon  
Hirio meulomp hor zant patron,  
Ha meditomp e vertuziou  
Evit bale var e roudon.

*Diskan :*

O sant Jilli, mignon Doue,  
Diwallit mad ho pugale ;  
Ha pa vo dent heur an tremen,  
Deuit gant Jesus d'o diarbenn !

Skedus eo glanded al lili,  
Skedusoc'h c'hoaz eo sant Jilli,  
Ha lintra 'ra e zantelez  
Etouez ar zent hag an elez.

E gerent oa gwir gristenien  
O chom e ker brudet Atheen ;  
Dre ouen e oant kar d'ar roue,  
Holl a galon oant da Zoue.

Sevel a rejont o bugel  
'Vel ma tere ouz tud santel,  
O rei dezhan deskadurez  
Hag ive kelennadurez.

Dizale dre e bedennou  
Doue a reas burzudou ;  
Eur c'hlanvour paour oe pareet  
Kerkent ma oe ganthan gwisket.

Gant aon rag brud ha meuleudi  
E tec'has neuze sant Jilli,  
'Vit kuzat en eun enezen,  
Pedi, hag ober pinijen.

Pellaat a reas eur vech all  
Evit douara e Bro-Chall ;  
Gant sant Ceser epad daou vloaz  
'Tekas beza santelloz c'hoaz.

Neuze ' pareas kalz tud klauv  
A oe digaset davethan ;  
Mez, var e veno re vrudet,  
Treuzas ar Rhon evel spontet.

Kuzat a reas e zantelez  
E ti eun ermit var ar mez,  
Aon hen doa rag enor ha brud  
Ha rag meuleidiou an dud.

Klask a reas kuzat gwelloc'h c'hoaz  
E unan e kreiz eur c'hoad bras,  
E kompagnunez eun heizez  
A vage ar zant gant he lez.

Beac'h a oe roet eun devez  
Gant chas ar roue d'an heizez,  
Hag hor zant a oe pistiget  
Hag etouez ar reier kavet.

Raktal ar roue a zavas  
Eur manati 'barz ar c'hoad bras,  
Ha sant Jilli a oe hanvet  
Kenta abad, ha beleget.

Doue a zav ar re izel  
Hag a ziskar ar re huel ;  
Sant Jilli, dous hag humbl bepred  
Muioc'h-mui neuze oe brudet.

Dre e c'halloud an drouk-spered  
Eun devez a renkas tec'het,  
Ha rentet e oe ar vuez  
En Auvergn d'eur verc'h a lignez...

E vuez oa meurbed santel  
Pa deuas Doue d'e c'hervel :  
Ar zul, deiz kenta gwengolo  
A oe deiz euruz e vâro.

E Toulous breman eo miret  
Relegou hor patron karet,  
Mez er baradoz gant Doue  
Eo digemeret e ene.

O sant patron, euz an envou  
Diwallit ho pugaligou,  
Deskit dezo humilite  
Ha fizians hepken e Doue !